

Kreizenn Vleimor.

AN HUNVREOU KAER.

Pa'z oamp aet en hent edo tarz-an deiz,  
O c'houlzaoui drant kern menezioù Breiz,  
Hag e kanemp holl, hag e kanemp hir,  
D'hon hunvreoù kaer a oa deut da wir.

Pa'z oa deut kreizteiz e oamp faez ha skuit  
Rag an hent oa serz hag an heol oa kriz,  
Hag e kanemp start, hag e kanemp gwell,  
D'hon hunvreoù kaer a oa tec'het pell.

Pa'z oamp deut endro e oa yan an noz,  
Hag ar bed e kanv' dan ar stered koz,  
Hag e kanemp c'hoas, 'kreiz an avel foll,  
D'hon hunvreoù kaer a oa freuzet holl.

Pa'z aimp c'hoas en hent e vo fall pa vraw,  
Petra vern avat ? Kana ' raimp ataw,  
Kana ' raimp dalc'hamat, kana ' raimp bepred,  
D'hon hunvreoù kaer a zo trech' d'ar bed.